

(269)

Chanson,
En form a Antretien,
Entre eur Bêleg Touet, pe Conformist,
hag eur Bêleg Rebel, pe Refracter.

Var an ton gallec: Un jour le malheureux Lybandre.

(270)

N'en deus qet pell, daou g'enderv bêleg
En em garvas en tor an haot,
Unan var bordic eur c'hanot,
Hag eg'ile var beg eur garec;
Heno, p'en em anavezont,
Gant respect en em saludjont;
Pell a voa ne voant en em velet,
Cals a rêzoniou diférant,
Alas! o devoa hint separet
Gen a gorf, gen a zantimant.

Ar C'homformist.

Bonjour, qenderv, gant humilité,
A bar ar bêleg conformist,
Va breur memes en Jesus-Christ;
Mes a boay e respont eg'ile:
Da vreur en quisionez e voan
D'ar c'houlz m'hanaves hor mam;
Og'en pa c'heus dezir renonset,
Hag anzaret Republik Frans,
N'en domp na qerent, na mignonet,
Foset ec'h an aliens.

Ar C'homformist.

Sansibl meurbet eo din da gomzou,
Penetri reont va c'halon,
Alienet eo da rêzon,
Me gred, oc'h ober da veachou.
P'ini ac'hanomp, d'ac'h avis,

En deus renonset d'ay ilis ?
 Pe te, pastor lach hag infidel,
 A'heus dilezet da zenvet,
 Pe me, bêleg ferm, prest da vervel
 En post, evel ma zeo dleet.

(271)

Ar Refracter.

Ha possibl ve, bêleg schismatic,
 E pe te collet da sqient !
 E falfe dit rei da entent
 E vemp-ni pastoret fanatic !
 Ar c'hlerje bras demeure a Frans,
 En o c'honseil a gouferans,
 A voës comun o deus desidat
 Incompetans ay Asamble,
 C'houi tout evel intrus discleriet,
 Aba m'o c'heus prestet ho le.

Ar C'honformist.

N'en em fi get re var da glerje,
 Na var o fos desizion ;
 An orgouil, an ambition
 A brezidas o asamble :
 Nobl e voant oll var o menou,
 Sujet d'o feñ ha d'o madou,
 Rac se ta n'aillent get quelet scler,
 Parlant hep parsialite,
 Na desida just var un afer
 Fondet var an egalite.

(272)

Ar Refracter.

Meurbet en em gavan estonet
 Ganet ha gant da Nation,
 Pa velan ar religion
 Generalamant abandonet ;
 Ha c'hoas e credit, Touerien,
 Ez oc'h veritabl bêlegien !
 Renonset oc'h eus dre 'l le civiq
 D'o prins, d'o lejitim roue,
 En consians d'ar fe catolig,
 Memes d'ar pab ha d'ar roue.

(273)

Ar C'honformist.

Ma ve gession eus ar virione,
 Ne lavarfes man var o stad,
 Rac, allas! gout a res erfat
 Ne medi get sur en da goste:
 Ha n'en des get an interest,
 Ar c'hoant da veza bepret mestr,
 E deus grêt dec'h oll quitat ho pro,
 Traïtourien lach, ifam poeltrom,
 O credi ferm, pa vijec'h distro,
 E pignac'h are var an tron?

Ar Refracter.

Hag out c'hoas gen hardi da brezeg,
 Ha gout erfat ezout cablus?
 Rac n'en dout nemet un intrus,
 Herves an urz a Velchisedec.
 Penos biscoas an Nasion,
 Daouest d'e fals prezomision,
 E deveus-hi bet otorite,
 Hebgen nemet en tampoel?
 An esqeb o deus digant Doue
 An oll pouvoar spirituel.

(274)

Ar C'honformist.

Va dioucouarn zo teus ha fatiq
 Ous da glêret o rêzoni,
 Pe dianc o fredoni
 Un nebeudic rimou fanatig.
 An esqeb, pa zint emigret,
 Eveldout zo destituet
 Eus o zitrou, couls hag an noblans;
 N'en doc'h nemet refracterien,
 Desedet sivilamant en Frans,
 Pa n'ay doc'h soublet d'e legen.

Ar Refracter.

Sa ta, ministi excommuniêt,
 Fier gant da Gonvansion,
 Ar pab eus e gomunion

En deus bet oll oc'h excludet ;
 Prononset en deus ar setans
 A henep oll Touerien Frans ;
 Rac se, mar gouzout da gategis,
 Conclu, rac n'en deo get dies,
 Penos d'an dud ermes an ilis
 N'en deus get a r'ibridigez.

(275)

Ar C'honformist.

Ignorant on sur var gementse,
 Nemeus get cals eus a furnes,
 A sqient nag a c'houieges ;
 Oc'en te gisqo din, martege,
 Palec'h en deus ar c'hategis
 Hanvet cheff vizibl an ilis
 Mestr, e-human, da beur-fulmina
 Ar fouldr, an excommunig'en
 Arbitraramant, pa blich ganta,
 Var' Frans, henep ar gristenien.

Ar Refracter.

Pab er gristenez, an tad santel,
 Ha cheff an ilis catoliq,
 A dleves da c'hout manifig
 En deus eur pouvoar universel,
 O tecreti al liberte,
 An divors, an egalite,
 Ha concubinach ar velen-
 E verit sur an Nasion,
 Specialamant an douerien,
 Reseo e valediccion.

(276)

Ar C'honformist.

Pell diouzomp, eme Sant Jerom,
 En e lizer d'ar pab Damas,
 Mar domp quir disqibien d'ar Grous,
 Ambision ha jalouzi Rom :
 Me a gomz ous sucesor Per,
 Santel, den humbl, pesqetaer ;
 Pa na heullañ cheff nemet ar C'hrist,
 On ferm en o communion :

(277)

Ennes eo prinsip euz C'honformist,
Ancret en e religion.

Ar Refracter.

Ah! nouzout-te get, den displeal,
Penos sur ar vajorité
A nac'he creñ voa un Doue
En Asemble got nasional ?
He n'en des get eur rêgoñ vat
Erit hoñ tud santel ar pab
Da refus dec'h e communion,
D'o tseleryi lach, infidel,
Da zansuri ferm un nasion
Obstinet er pec'het marvel ?

Ar C'honformist.

En em drompla lound a res serten,
Mar sonjes on eus-ni touet
Or bize bigen aprouvet
Nep sort enep ar doctrin gristen.
Consult erfat an Arviel,
Consult symbol an ebestel,
Symbol Nicee ha sant Athanas,
Hag e conseri, marteze,
N'on eus diroutet er fe biscoas,
Na dishanavezet Doue.

(278)

Ar Refracter.

Servit ho qinon, tud infidel,
D'an ilis couls ha da Zoue;
Poc'h eus distrujet ho roue,
Hag ho rouanes, pobl criminel,
Oc'h eus minet en ber amzer
Dindan an tron hag an oter;
Gwasoc'h oc'h cals evit barbaret,
Monstrou dinatur hag impi,
A verit oll beza masacret,
Ha mont d'an ifern da lesqi.

Ar C'honformist.

Pa nann zantes get a ziabel,



Es ret din sgei ganet a dost;
 Me vel e redes sur en post
 A enep prinsip an aviel:
 Te n'en dout hegen schismatic,
 Me vel erfat out heretik;
 Liesoc'h e c'heus grêt a verser
 Dre 'r valis eus da fos doctrin,
 Erit n'en deveus Robespier
 Dre 'r fuzuil hag ar g'illotin.

(279)

Ar Refracter.

O detestabl revolution!
 An Asamble nasional,
 Gazi var digare farsal
 A forjas eur bersecusion:
 Pillet o deus hon ilizou,
 Hag uzurpet hon oll vadou,
 Ha c'hoas e clasont caout hor bue;
 Rac ma na vijemp emigret,
 Pa na gariemp presta prompt al le,
 E voamp brêma g'illotinnet.

Ar C'honformist.

Gwir e e vijes g'illotinnet,
 Mais abalamour da betra?
 Seul erit madou ar bed-ma,
 Pere tout n'en dint nemet mog'et:
 Ar reze a glask o difen,
 N'en dint nemet mersenerien,
 Ha a zeu da g'emeret an tec'h.
 Ar pastor mat ne ra get se,
 Mes a rayo bepret en peb lec'h
 Erit e zenvet e vue.

(280)

Ar Refracter.

An Aviel ne lavar get d'emp
 Senti dimeus an tirantet,
 D'ar pillach creñ determinet,
 Na qenebent memes e tiefemp
 Carout un nasion barbar,
 Injust, m'ar boe var an douar,

(281)

An devor betè mel hon esqern,
 Ag'en t'c'hel rac e furi,
 Evel eus a galon an ifern,
 Pe deus a goler eur goal-g'i.

Ar C'honformist.

Gaer ac'h eus èsat terjiversi,
 Hag epuiza va c'hestion,
 Atribui d'an Nasion
 Ar pezh en deus grèt an dud impi.
 Te ne c'h eus get a charite,
 A zouster nag humilité;
 Dre da vaximou pernisius
 Ha trubuilhus d'ar gonziars,
 Ha da chansoniou seditius,
 E c'h eus grèt mil malheur en Frans.

Ar Refractor.

(282)

Comans a res rei din da gredi,
 Ma vijemp tud obeissant
 E tle Kemp oll presta 'r sermant,
 Hag e vije chomet pep-hini
 Da veilli var an eneo,
 Alhas! evel denvedig'ou,
 Simpl, credul, hep education,
 Expozet d'ar blei devorant,
 En risq da goll o relijion,
 Defot a bastor vijilant.

Ar C'honformist.

Joa bras ameus sur ous da glêvet
 Oc'h objuri da zantimant;
 N'en deo nemet antetamant
 Rezista ous nep zo propoget
 Da c'houvern ar madou terien,
 Hag int tud fall ha volerien,
 Rac nep deus nep sort otorite
 A lavar Sant Paol ha Sant Per,
 N'ay deu demeus a-beurs un Doue:
 Oboisa zo neseser.

Ar Refracter.

Horol ameus o consideri
 Ar maleurion zo grêt en Frans,
 Trubuilhet ã va c'honsians
 O velet furor an dud impi
 O scuilla gvad ar gristenien,
 Hag ã, siouas! ar vëleyer
 O deus-hint oll ocazionet;
 Ar bobl credul eus ar Vandee,
 Ha c'hoas ouzpen, cals a Vretonet
 Zo testou mat a g'ement-se.

(283)

Ar C'honformist.

Acord exomp brêma, va mignon,
 Ha conform en hor zantimant
 Examinomp prezantamant
 Ar schism a zavas en Arignon;
 Goude cals eus a drubuilhou,
 Ne voe cleze na furzuilhou,
 A lavar an den savant Jerson,
 Mes douster, prudans, modesti
 A ras acord an divizion,
 Ha dont memes d'e detesti.

Ar Refracter.

Rezon e'heus sur e gementê;
 Mes bar din c'hoas en langach ber,
 Perac eus gemeret afer
 Ous ministret an Otrou Doue?
 Perac ravaji couenchoù,
 Disunani personachou,
 Tud santel o devoa renonset,
 Deus an eil sex hag eg'ile,
 D'ar bed, d'ar c'hiq ha d'ar drouc-speret,
 Evit nos-deiz pedi Doue?

(284)

Ar C'honformist.

Respont dit amân ne meus afer;
 Gercouls ha me, te voar erfat
 Eo d'ar Republiq hon oll vad
 En eur brezel just ha neseser.
 Ar rest demeus da g'estion,

(285)

En faveur ar religion,
 A dremenfomp sioul dinday silans :
 Laret a rer en meur a lec'h :
 Respect d'o frog ha d'o reverans,
 N'ey doa get chast an oll venec'h.

Ar Refracter.

Entent mat a rañ da bropozion ;
 Seifr ar venec'h a voa dleet,
 Qercouls hag al leanezet,
 Mes obvia d'an oll abuzion,
 Da g'ement vis ha goal gustum
 An devezs oll a rum en rum ;
 Og'en c'hoas zo da rum beleger,
 Ha n'er gouies get, marteze,
 Darn cuzet, darn concubinerien,
 Petra lares-te aneze ?

Ar C'honformist.

(286)

O ! brema te gomz eus a vonstron,
 Vomiset abeurs an ifern,
 Devoret bete an esqern
 Gant ar sec'het eus ar malheuriou :
 Malheur d'anep o zelalous,
 Malheur d'anep oute gento,
 E mañt azione'h an oll abimou,
 En balans var eur c'hos plangen,
 An tempest, liouc'het ha curunou,
 Hag an tanfoeldre azione'h o fen.

Ar Refracter.

Ha posibl ve eus anese
 E comz ar profet Daniel,
 Ha var e lec'h an Aziel,
 Pa barlant var sujet gementee ?
 Hag aru e vez an amzer
 En pehini sur e tleer
 Guelet an abomination
 Oc'h occupi plasou santel,
 Ha c'hoas an dezolasion
 Deut eus a gouarn criminel ?

Ar C'honformist.

Ia, pæzeg a reont serten
 Control da lezen Jesus-Christ,
 Precursoret d'an Antechrist,
 Int d'an eneo gouir vourvien;
 Ha ve posibl pervertisa
 Dre gonsel, hag hoc'h ajisa,
 Memes an dud choazet gant Doue,
 Ha coll ar bed universal,
 Hep scrupul, me gred, hint er grafe,
 En detrimant d'an Eternel.

(287)

Ar Refracter.

Hint eta, michans, o deus armet
 An eil breur enep eg'ile;
 Collet o deus doujans Doue:
 Gant Satan eo ret e vent charmet.
 Dre o c'honsel, ameus avis,
 Eo rentet dezert an ilis,
 Erit frequent crêvier, granchou,
 Clandestinamant hep relach,
 Ha da rasampli cals a destou
 D'o foncisonou sakrilach.

(288)

Ar C'honformist.

Evidon nen don tam tout souezet,
 O velet ar paour q'ez payzant,
 Grosier, dosil hag ignorant,
 Evel eur vander bigodezet,
 Rebut an dud fur er bed-man,
 O c'heuil quir vinistriet Satan,
 A goach ho goal inclination,
 Hag o sperejou seductor,
 Dindan mantel ar religion,
 Ha dianves ar gouir bastor.

Ar Refracter.

Anzao zo ret ezint criminel,
 Tud fal ha tud permisius,
 En consians malisius,
 Laos int d'ar g'ernes ha d'ar brezel.
 Me gomz hepken demeus ar re

(289)

A zo control d'ar virione ;
 Mes ar vëleyen zo demezet,
 En nep g'is n'ent dint bet rebel,
 Nag er sivil da nep sort decret,
 Na da lezen an Eternel.

Ar C'honformist.

Méz a res din o comz anezh ;
 D'igenoret o deus ho stad ;
 N'en deus qer zot na voar erfad
 Ezint criminel dirac Doue :
 An Ihs e deus-hint condonnet,
 D'he disiplin hint opozet ;
 Ma na g'eront ober pinijen,
 En tanas, siouas ! d'o ene,
 Ec'hallent hint antien birnigen
 Allas ! en barados Doue.

Ar Refracter.

(290)

Poent sur eo d'emp en em separi,
 Non get en asurans ama ;
 Ret eo din quitat ar vro-ma,
 Ar pes a zeu cals d'am glac'hari.
 Adieu, va brois, adieu Ferros,
 Adieu, va c'hêriq a Laneur,
 Pa renqan retorn da Vro-Zaos,
 Marteze vo vit va malheur.

Ar C'honformist.

Gleun, glac'har ameus ous da velet,
 O renqout dilezel da vro ;
 Allas ! un arêt a varo
 A zo bet prononset ec'h kenep.
 Plizet gant an Otron Doue
 Vemp c'hoas oll uniset un de ;
 Mes, adieu, gant ar regret vrasa,
 Me bedo Doue deis ha nos,
 Ma n'en em velomp get er bed-ma,
 Ma'n em velfomp er barados.

Amen.

(vol. I, p. 269 - 290.)